



LEVRIG-C'HOARIOÙ 3-6 VLOAZ



BARZAZ BREIZ

KAN BREIZH



MIRDI
BREIZHEK
AN DEPARTAMANT

Barzaz Breiz

KAN BREIZH

Degemer mat er Mirdi breizhek !

Barzaz Breiz zo ul levr ma oa bet bodet kalz a ganennoù gant Teodor Hersart Kervarker 200 vloaz zo !

Mont a rae Teodor a gêriadenn da gêriadenn, selaou a rae an dud o kanañ ha goude-se e skrive ar pozioù hag an notennoù sonerezh en e garnedoù : un dastumer e oa.


En diskouezadeg-mañ e kinniger an temoù a gaver er c'hanennoù-se : mojennoù Breizh, istor Breizh, buhez pemdeziek an annezidi.

Emaout o vont da welet oberennoù (taolennoù, kizelladurioù, tresadennoù...), da selaou Teodor ha dreist-holl kanennoù eus *Barzaz Breiz*.

Kavout a ri ar respontoù d'ar goulennoù a zo al levrig-c'hoari e dibenn an diskouezadeg (sal 12).



KAE D'AN EIL ESTAJ EVIT KREGIÑ GANT C'HOARIOÙ DA LEVRIG.



Un nebeud reolennoù a ranker doujañ dezho er mirdi :

Met :

- arabat eo mont re dost d'an oberennoù
- arabat touchañ an oberennoù
- arabat diskouez un dra bennak gant da greion


Gallout a rez :

- c'hoari, sellet, hunvreal, pourmen, distreiñ, dont en-dro
- sevel goulennoù
- chom hep gweladenniñ pep tra



SAL 8 2ND FLOOR : BRETON LEGENDS

Amañ e ri anaoudegezh gant mojennoù Breizh kanet e *Barzaz Breiz*. Istorioù int a vez kontet gant an dud an eil re d'ar re all. Savet int diwar istorioù gwir pe tennet eus ar faltazi. Kalz a ganennoù eus *Barzaz Breiz* a vez kanet en deiz hiziv c'hoazh, kalz a arzourien a adkemer anezho hag a zispleg anezho en-dro : gant kanaouennoù, livadurioù, kizelladurioù...



1. Lug da dokarn ouzh ar bonn sonerezh a-dal da daolennoù BRAUNWALD diwar-benn Kêr-Iz ha selaou ar c'hanennoù (n'eo ket ret dit selaou anezho penn-da-benn).

Un delenn eo ar benveg emaut o klevet.



Ha plijet eo dit selaou ar benveg-se ?
Kelc'h ar smiley a glot gant ar pezh az peus santet.



2. Kav an daolenn-se gant Jules COIGNET ha sell mat ouzh an dalenn ziwezhañ (ar foñs), petra a welez ?
Kelc'h ar respont mat.



Un eskob hag ur Peulvan



Un Daol-vaen hag un eskob



Ur manac'h hag un Daol-vaen




3. Kav an daolenn anvet *Tec'hadenn Grallon*. Emañ ar roue Grallon o vont kuit eus kêr (er foñs), ha ret eo dezhañ tremen dre ar mor. War beseurt loen e teu ar Roue Grallon a-benn da dec'hout kuit ?

Kelc'h ar respont mat.



4. En holl oberennoù a vez gwelet er sal-mañ ez eus bet taolennet mareoù eus mojennoù *Barzaz Breiz*. Pep tudenn zo bet taolennet gant un arouez : un draezenn pe ul loen a vez bepred gantañ hag a ro tro da anavezout anezhañ.



SAL 9

EIL ESTAJ : ISTOR BREIZH

Amañ e vez graet gwerzioù eus ar c'hanennoù. Anv zo eus kanennoù trist ha kalet alies, ma vez kaoz eus istor Breizh. Tudennoù kreñv ha kalonek a gaver enno.



5. Kav an oberenn *Sakr Nevenoe*. Emañ an eskob o lakaat un dra war e benn evit lakaat anezhañ da roue, petra eo ?


Kelc'h ar skeud mat amañ dindan.




6. Kav ha kelc'h ar skoedoù-ardamez a weler amañ dindan war an daolenn *Stourm an Tregont*.



Ha te ?
Penaos e vefe da skoed-ardamez ?



7. Kav ar 4 c'hemm etre an daolenn a zo ez levrig hag an hini diskouezet er sal !



SAL 10

EIL ESTAJ : AR VUHEZ PEMDEZIEK EN 19^{VE} KANTVED

8. Lug da dokarn ouzh ar bonn sonerezh dirak an daolenn *Hent ar vourc'h, Penn-ar-Bed* gant Camille BERNIER ha selaou ar c'hanennoù (n'out ket rediet da selaou anezho penn-da-benn).



2 goublad binvioù a c'hallez klevet :

Binioù ha bombard



Violoncel ha piano



Ha plijet eo dit selaou ar benveg-se ?

Kelc'h ar smiley a glot gant ar pezh az peus santet :




9. Sikour Gwenc'hlan da gavout e dog ! Evit an dra-se ne rankez tremen nemet dre an oberennoù a welez er sal-mañ.

DIWALL : arabat sevel da greion !



10. Talvezout a rae ar mekanik-mañ, 200 vloaz zo, da labourat ar parkeier (da dreñ an douar).

Gant sikour an oberennoù diskouezet, laka ar marc'h a zo o stlejañ ar benveg hag ar peizant a zo o heñchañ anezhañ el lec'h mat. Liamm an tudennoù e tu a-raok pe e tu a-dreñv an arar.




11. Sell ouzh oberennoù ar sal ma welez peizanted : peurliesañ int gwazed gant un tog hag a zalc'h binvioù etre o daouarn. Pelec'h emaint o labourat ?

Kelc'h ar respont mat :



war ar maez



war vor



er menez

12. Piv on-me ?
Ur gwaz on.
Un tog zo ganin war ma fenn.
Botoù-koad zo em zreid.
Emaon o tiwall an deñved.



Hag anavezet ez peus ac'hanon ?

Ma respontez « ya », kelc'h an daolenn vat amañ dindan !


SAL 11

EIL ESTAJ : AR VUHEZ PEMDEZIEK EN 19^{VE} KANTVED

An Ifern hag ar Baradoz zo daou dem a zo anv anezho e kanennoù *Barzaz Breiz*. Un dudenn brudet eo an Ankoù. Skeudenniñ a ra ar marv. E-pad an noz e vez o tastum eneoù ar baotred hag ar merc'hed en e garrigell hag o kas anezho da ved an Anaon.



13. Liamm ar pikoù amañ dindan evit lakaat an dra a zo e dorn an *Ankoù Bokedet* da zont war wel.





14. Kav an daolenn anvet *Taolennoù*: Ar Salud. E-touez ar munudoù amañ dindan, barrenn an hini n'emañ ket en daolenn-se.




SAL 12

EIL ESTAJ : STAL-LABOUR AN HAROZED HAG AN HAROZEZ

Gwelet ez peus kalz a harozed a bep seurt en diskouezadeg a-bezh. Amañ emaoût e koad Breselien c'hoazh (kuzhet a-dreñv ar gwez a-wechoù...). Dit eo da grouiñ da haroz ha da harozez. Ouzhpenn d'an drolinenn amañ dindan: dilhad, rikoù, arouezioù, ha traoù all c'hoazh.



DIDROC'H AN TUDENNOÙ HA FARD DA HAROZ PE DA HAROZEZ DIT.



JANEDIG - AR FLAMM

NEVENOÙ - TAD AR VAMMVIRO